

CHANSON AR PEDER VESTREZ.

Var un lon neñt.

D'ar reb a so bet ganet en ur blanedenn galet,
Oll o demarchou guella so demarchou collet;
Ha c'hoas mar deñ dre eñch caver tam plijadur,
Dre eñn nombr a zisgrañou o peñ gant uzur.

*

Eñt prouvi va dessin, na renñ qet furchal
Arñvion ar baros-mañ hac ar barosiñ all a
Na meñ nemerteurel ur zel varnonne va-unan,
Ha demeus ar virione me a rei preuy hep poan.

*

Un detail selér ha sincer demeus ar malheuriñ
A zo aruet genén e cals eus a vroyou,
A zisqo da beb-unan, hac a brouvo certain
Pegen trist eo an etat eus ar guell blanedenn.

*

E, zàn eta da gomañ an etat fruezus
Demeus va eñch dinatur, va bue malheurus



Selaout eta, tud yaouanq, ha mar qeret divoal,
Marteze c'houi brofito a valheuriou re all.

Dioualit eus an amour, ennes ar pen qenta
Demeus an oll disgraçou ameus bet er bed-mâ;
Poan memes ra din sonjal en anqen diremet
A meus bet var an douar o veza re garet.

Peder Vestres a meus bet : voan en Ameriq,
Ha diou ebars en Europ, hac un all en Afriq;
Ar genta voa hanvet Cato, an eil Genovefa,
An deitvet voa Pelaji, ar bedevet Anna.

Ne voan nemet pemzec v'hoas pa gomancis qenta
Mont da velet Cataouic ha d'e zarempreda;
Ma carien, e voan carer, a gemeñse voan sur,
Nonobstant d'hoñ amitie, n'ot' boa tam phjadur.

Ma aboster am dalc'he dre ma voan re yaouanq,
N'ellen na comz, na qerzet, nonobstant d'am oll c'hoant;
En eur memes stat e veve an objet a garien,
Hon huanadou a re' hon oll antremen,

Nao pa zec miz e voan bet en eun evelep poaniou,
Ha c'hoas e vizen chomet, daouest d'am zourmanchou,
Peneverde ma animas qerent va mestrez qer,
Hac a zifennas outi cabuet comers gant gloer.

*

Nonobstant d'ho difennou, ni n'eur gave bepret
 En eur plaç hor boa choazet evit enem velet;
 Mes qer e voe d'ar plac'h-ma cavet fidelite,
 Dre ma vize maltretet er guer pa ervue.

*

Bonjour ha joa, va mestrez, hirie penos a re? !
 Petra oc'h eus a nevez? meurbet oc'h contristet!
 Possub e ve ho qerent a ve qen dinatur
 Da exerç en oc'h enep o maliç dreist musur!

*

Ya sur va servicher, me a eprouvas dec'h
 Ar valiç demeus va zad, an nerz demeus e vrech,
 Oguen evit qementse ne roan caz ebet,
 Pa meus gallet sortial e zon deut d'ho quelet.

*

Oc'h amitie zo fidel, me zo charmet dreisi,
 Me vize em plijadur ma vizemp hep anvi:
 Mes qeit a ma valéin var bave Landreguer,
 N'or bezo evit partach nemert poan ha mizer.

*

Hi, p'am glêvas, a laras evit va c'honsoli:
 Remuomp ar resortebou demeus hon industri;
 Marteze dre bod adres ni a deuyo a ben
 Da appesi o c'holer ha d'o distrei a grenn.

*

Hi a eure he fossubl, me eure va hini;

Nonobstant d'hon effortjou ze' gresqe hon anvi :
 Neuse e velis certen ne voa demp nep moyen
 Da souten ar groas ponner pini'r boa da zougen.

*

Neuse eta e ris ive va effort diveza ,
 Ha ma sonjis e voa ret en em dispartia ;
 Ogen qent evit quitat e-zis da velet Catou ,
 Da gonta dei va doars ebars en ber gomzou.

*

Na hortois nep respont a c'hinou va mestrez ,
 Me a gutas anezi leun a dristidignez ;
 An deiz varlerc'h e ris bent evit mont da Baris ,
 Elec'h ma c'homis var dro eur seiz pe eun eiz mis.

*

Ne voa netra er gær-mâ, daouest d'e oll fompou ,
 A gement a zisipje en nep gis va c'hanvou ;
 Ar zonch afflijant demeure ar pez am boa collet
 Na bermete d'am speret cavet tam joüstet.

*

Me receve lizerion eus ar douchanta ,
 Hac a rê d'am c'houlion a neve divoda ;
 E finqement a receven demeure a nec'hamant ,
 Ma sonjis mont en ur plaç all da glasq soulajamant.

*

An effet a heuillas va zonch , ma quitais va studi ,
 Ha me monet d'ar Rochel vit enem ambarqi ,
 Ha me mont d'ar C'holoni , da zouar Canada ,

Ellec'h ma ris ar rancontr eus a Genovefa.

*

Honnes voa ar charmanta demeus an oïll merc'het
A guement am boa biscoas var ar bed-mân guelet;
C'hoas e remerqen enni modesti ha prudanç,
Un antretien charmant ha cals eus a chevans.

*

Evit petra benaqet, nan don qet hep douï
Ne zeus den var an douar a guement zo hep si;
Mes ne allân qet credi e vije em mestrez
Nemet perfectionou ha pep seurt madelez.

*

Mes allas! dalleidiguez eus ar speret humen!
Me na velen qet cuzet dindan ar roz ar spern;
Me na allen qet guelet dindan croc'heñ an noan,
An natur hac ar valiç demeus an aerouan.

*

Me a voe pel amaret gant al lassoù tromptus.
Scolmet gant dorn milliget an draitourez Venus;
Me voe pel en ser-jitud; an amzer gouscoude
A uzas va chadennou, m'am boe va liberte.

*

Sortiet a esclavach, uzet va chadennou,
Va oïll occupation voa cassat va joayou;
Mes eus en em re fiout, eur pech all am siss,
A voa c'hen e remottjon, anoes c'hoas am dallas.

*

Na recevis nep gouli na raje din anqen,
 Ha mar boan dalc'het captif, va etat a garien;
 Diadan ampir Pelaji, rouanes va c'nalon,
 Me receve eur joa vras ha satisfaction.

*

Qement am anavere a lavare hep mar:
 Ema eo chapsussa den a so var an douar,
 Dre ma plich da Belaji, fleuren an oll merc'het,
 Un exempl a vodesti, gant oll admiret.

*

Me va-unan a sonje penos en devoa grêt
 Ar rod a fortun un dro benaqet em andret;
 Mes depordet un nebeut qent coll patientet,
 Hac e cléfet e voamp et pella m'el Kemp monet.

*

Fixet voe guenemp an deis evit accomplissa
 Ar bromesse hor boa grêt vit enem unissa;
 Mes me yas da chaséal un devez d'eur forest,
 Elec'h ma eruas guenen un accidant funest.

*

Me racontras dec sovach, tud ar re uzussa,
 Hac en eur stringjont varnon en avis va laza;
 Mes Doue oll-buissant, mad en andret an oll,
 Demeus ho dorn redoutabl a aretas an tol.

*

Va liberte goustoude diguena a lemjont;

Hac en guiz ur c'hriminal da Vro-Saoz em c'hejont.
 Adieu eta, va mestrez, adieu d'am Pelaji,
 Pa ne varvis, birviquen ne varvan vit anv.

*

Me laqa fin d'am histor en soñt ocaziñ,
 Hac a ra niou d'am speret ha chagrin d'am c'halon,
 Mes c'hoas e teu din zouch deys va douciq Anna,
 A b'ini e comzin deoc'a gent evit finissa.

*

Madou, guenet ha famill, humilite, chevanç,
 A' bep amzer anezo e devoa abondanç;
 Daouest d'am indignite, brema ez eus tri bloa
 Deus e amitie em boa ar bortion guella.

*

Ebatal a rejomp on daou ha plijadur or boe
 Epad ur bloa pe ouспен, hervez hor bolonte;
 Mes an drouc chauch ordinal eus va tieuill pas a pas;
 Daouest d'hor fidelite, allas! hor separas.

*

Chetu aze, va breudeur, un darn eus va bue,
 Circonstançou a lézàn hep comz eus aneze:
 Avoalc'h e meus lavaraz evit rei da breven
 Er pez e meus anoncet e penn va c'hanouen.

*

Guir eo simpliciteou eo certen qement-ma,
 Me a glefe cavet mez da zont da recita;
 C'hoarzit eta, mar qeset, ne vo qet hep justiq;

Mes diroalit da goea er meme precipsis.

*

C'houi dretst peb tra, gloer yabuanaq, ho pedan
da evessat,

Goude charzin re abret, n'o pez qenz diverzat.
N'o petet get gant merc'het enep seure mignonach.
Qeit a ma voc'a o pousu ha studi er scolach.

*

C'houi a ocup ar plaçou a meus bet ocupet,
Sujet d'an occasionou o deveus ya dallet :
Lest ar merc'het a goste, tachit d'en em avanç,
Pedit Doue d'o sicour, hac o pezo guel chang.

*

Pedit Doue d'o sicour, hac o pezo hep mar
Bonheur ebars er bed-ma, hac er bed-all ar gloer,
Ha pa vezoc'o o pedi, ma zellet gant true,
Me a esper, cavet c'hoas chanch' ha prosperite.

F I N.



E MONTROULEZ, eus a Imprimeri LEDAN.